

HEKLEV SEVENADUREL

	A-dreuz lenn	2
	Petra nevez ?	7
	Kelaouennoù	17
	Notennoù	23

Herve LATIMIER

**Mouvements sociaux et
économie solidaire,**
dindan renerezh Jean-Louis
Laville, Geoffrey Pleyers,
Elisabetta Bucolo ha
Jose Luis Coraggio,
Desclée De Brouwer, 2017,
490 pajenn, 21,90€



Ur pennad digeriñ, c’hwec’h rann, daou bennad evit klozañ, daou aozer ha tregont... Unan eus pinvidigezhioù kentañ al levr eo digeriñ hon speredoù war pezh a dremen e broioù “ar Su”. Arabat kenderc’hel da soñjal ez eo Europa kreiz ar bed... Ur bern skouerioù a gaver diwar-benn ar pezh a vez savet e Amerika ar Su met ivez e Kebek pe Japan pe

Europa war tem al liammoù etre ekonomiezh kengret ha luska-
doù kevredigezhel. Evit lavarout
berr-ha-berr gellout a rafe bezañ
eus un tu ar re a soñjfe ec’h a
enep ar stourm hollek krouiñ
traoù fetis a “gempennfe” ar
sistem, hag eus un tu all ar re a
soñjfe n’heller ket chom en ur
stourm teorikel ha politikel enep
ar sistem hep klask cheñch an

traoù war an dachenn. Evel-just ez eo soutiloc’h an traoù. Gellout a ra ar saviadoù bezañ disheñvel-kenañ. Ar gentel eo n’hell ket an ekonomiezh kengret troc’hañ he darempredoù gant al luskadoù kevredigezhel hep bezañ en arvar koll hec’h ene – gwelout a reomp mat e Breizh gant kevelourioù zo – ha n’hell ket ar stourmoù kevredigezhel chom hep kaout disoc’hoù er vuhez pemdeziek. N’eo ket kemm an traoù ar pal ? Sevel un doare demokratel ha kengret da aozañ ar gevredigezh o tieubiñ anezhi diouzh galloud azeulerien ar marc’had.

Pouezet e ve e pennadoù zo war liested al luskadoù : stourmoù labourerien-douar evel-just, met stourmoù evit plas ar merc’hed, an doujañs d’ar sevenadurioù, an endro... Mont a reont alies war memes tu met n’eo ket hep dislavaroù ha tabutoù.

Evit an aozerien, e-pad re bell eo bet renet an traoù koulz war dachenn ar politikerezh ha war dachenn ar studi gant ar plas kreiz roet d’ar vicherourien gant an dielfennadurioù marksour. Ne glotent ket gant saviad ar gevredigezh en XIX^{vet} kantved dija (ne oa ar vicherourien nemet un darn vihan eus an dud) ; ne

glotent ket gant ar stourmoù “nevez” meneget a-us. Trec’h ar sell marksour a zo bet trec’h ur sell stadelour enep ar sell kevelourour ha kevreadelour maget gant mennozhioù evel re bProudhon. Dave a vez graet alies er c’hlozadur d’al luskad *associationniste* en XIX^{vet} kantved. Kemer ar galloud kreiz ne gas ket dre ret ar gevredigezh war-du an demokratelaat.

Danvez preder e-leizh, skouerioù dedennus (eus Amerika ar Su dreist-holl, gant perzhioù dibar an iliz katolik ha stourm ar pobloù indian), ar santimant n’eus diskoulm eeun ebet d’an darempredoù etre ekonomiezh kengret, luskadoù kevredigezhel ha galloud politikel. Kemmus eo bepred ar saviadoù. Kaout doujañs evit an dud, o oberezhioù hag o mennozhioù, evit ar sevenadurioù hag o disheñvelderioù, evit an natur, reiñ pouez d’an eskemmoù gwirion ha d’an demokratelezh a seblant bezañ hentoù mat da gemer ma klasker kuitaat ur sistem hag a zistruj kalz mad an holl evit gounid bras un nebeudig.

**La fin du chemin,
1920-2000 des
indépendantistes en
Bretagne,
gant Maryse Le Roux,
heuliet gant Repères
chronologiques,
gant Ismaël Dupont,
Skol Vreizh, 2017,
202 bajenn, 18€**



Kalz eus ar stourmerien a-vremañ n'anavezont ket ar prantad eus istor Breizh a ra danvez al levr-mañ. Me en o zouez. Traoù klevet amañ hag ahont, flemmskridoù pe levrioù savet gant perzhidi pell eus ul labour istorour. Un darn eus ar re se a gaver el levr-lennadur kinniget e fin an oberenn. Labourioù istorourien wir ivez, eüruzamant.

Ret eo studiañ ar prantad-se evit gellout ober e vennozh ha gwelout penaos e oa tud gant mennozhioù eus an tu dehoù pellañ, tost ouzh an naziellezh, er stourm evit Breizh. Alies ne wel tud zo nemet ar re-se evit chom hep gwelet skourroù all. Kalz a vesk pep tra a ratozh-kaer evit lakaat de grediñ o deus an emsaverien a hirie memes mennozhioù. Doare aes da chom hep burutellañ ar vroadelouriezh

c'hall hag ar pezh he deus degaset hag a zegas c'hoazh.

Degas a ra *La fin du chemin* ur sell prizius war ar re o deus kemeret perzh e darvoudoù prantad an eil brezel bed. Un doare heuliad poltriji eo. Ne skriv Maryse Le Roux nemet diwar-benn tud he deus kejet ganto hag a zo aet da Anaon. Gwelet he deus tud all (tud eus an FLB da skouer) met ne lavar netra diwar o fenn. E fin he levr e kaver evezhiadennoù (diwar-benn ar vrezhonegerien dreist-holl) gant Pêr-Jakez Helias pe Michel Le Bris, Gilles Servat hag Yvon Le Menn. Ne zesker ket kalz tra. Klichedoù bet lennet alies evit lod anezho. Dedennus-tre eo an oberenn ha skrivet mat. Lenn a reer anezhi buan. An dra briziusañ eo he deus gwelet ar re he deus aterset evel tud ha darempredet anezho gant doujañs peogwir int tud.


Lenn a reer war golo al levr « *En les écoutant, je m'étonnais d'être passionnée par des gens dont je n'aimais pas les idées* ». Setu perak ez eo plijus al levr : klask kompren hep digareziñ. Skrivañ a ra p.116 : « [...] rien n'est jamais aussi simple qu'en apparence, la complexité humaine infiltre et défie tous les systèmes de pensée ». Pevar foltred 'm eus kavet dedennusoc'h eget ar re all : re Yann Fouere, Yann Bouëssel du Bourg, Meaven ha Yann L'Hardon. Dizoloet em eus an denmañ a-drugarez da vMaryse Le Roux hag anat eo he deus skoulmet gantañ un darempred ispisial betek mont da welout anezhañ pa oa war e zalaroù en ospital Morvan, hag erruout re ziwexhat. Meur a bennad zo diwar e benn. Setu ar pezh a lenner p.74 : « *Je croyais qu'il allait être une de mes rencontres, un aiguillage vers d'autres personnalités, un vecteur de mes investigations sur ce milieu. Il allait être ça, et bien plus, et il est mort à mille lieux de se l'imaginer. Petit à petit, ma recherche s'est organisée en étoile autour du point fixe que formait son histoire. Les autres témoins me ramenaient à lui* ».

An doare denel da gomz eus an dud ne vir ket ouzh Maryse Le Roux da lavarout sklaer ar pezh a soñj diwar o fenn hag o mennozhioù. Reizh eo.

An eil lodenn (p-p.119-194) n'eo ket ken dedennus. Re verr, re sec'h, met diaes e oa ober a-hend-all pa saver ul listenn *repères chronologiques* ha buhezskridoù ur bajenn pe un nebeud pajennoù pep hini. Hegazus eo kavout e seurt labour titouroù faos (unan da nebeutañ) a vez kaset d'ul levr d'egile hep o gwiriañ. Daoust da se ez eo talvoudus al labour rak renablñ a ra ur bern fedoù.


Ul levr da vezañ lennet eta, dreist-holl evit lodenn Maryse Le Roux. Mat eo evit prientiñ an dazont gouzout burutellañ, garv ma vez ret, mennozhioù ha dibaboù an amzer dremenet.

**Comment peut-on
être catholique ?,
gant Denis Moreau,
Le Seuil, 2018,
358 pajenn, 22€**




Kelenner prederouriezh e Skol-Veur Naoned eo Denis Moreau. Ne guzh ket ez eo ur c'hatolik hag un den a-gleiz. Alies e kav war e hent tud a gav souezhus e c'hellfe ur c'helenner prederouriezh bezañ katolik, etre fent, hag enebiezh. Alese an titl gant an dave da *Comment peut-on être Persan ?* Montesquieu pe, marteze, da *Comment peut-on être Breton ?* Morvan Lebesque. Piv 'oar ? Klask a ra respont ar poellekañ posupl (prederour eo...) d'an arguzennoù, sirius alies, a glev enep ar gatolikiezh. En ober a ra en un doare plijus da lenn. An tri chabistr a zo anvet *Foi, Charité, Espérance*. Ur *private joke* evit ar gatoliked. Ma kaver ar garantez hag ar joa e-kreiz e breder e kaver ivez prederadennoù war an droug, plas ar merc'hed en Iliz, ar gapitalouriezh, personelezh Jezuz, an

ifern hag ar baradoz, perzhioù bamus ha torfedoù an Iliz, an abegoù da grediñ e Doue hag ur bern traoù all... Mard on bet hegazet ur wech pe ziv em eus bet kalz plijadur o lenn al levr. Evel ma lenner war ar golo n'eo ket pal an oberenn treiñ tud war du ar relijion met diskouez e c'heller bezañ katolik hep bezañ bleup. Reiñ a ra d'ar re a gred arguzennoù evit kadarnaat o dibab. Diskouez a ra e c'hell ar gatolikiezh bezañ ur respont poellek pa venner ober un dra dalvoudus eus e vuhez. Dedenus evit an holl eta, gant ma lenner anezhañ gant ur spered digor. Ouzhpenn ez eo skrivet sklaer ha brav, aes da gompren ha leun a fent.



**Tudual HUON,
Herve LATIMIER &
Malo BOUESSEL du BOURG**

**Er gêr hag er bed,
gant Rabindranath Tagor,
brezhoneg gant
Yann-Varc'h Thorel,
An Alarc'h embannadurioù,
286 pajenn, 13€**



Un ikis a romant eo *Er gêr hag er bed*, gant Tagor. Diamzeriet e meur a geñver, met chomet modern-kenañ war ar memes tro. E Bangal emaoamp, da vare al luskad broadelour anvet Swadeshi. Aduidi an emsavadeg-se a enebas ouzh rannadur ar vro e div lodenn gant ar gouarnour Saoz Lord Curzon e 1905. Broudet e voe ar spered broadelour

pelloc'h ha boikotet e voe ar produioù enporzhet diouzh Bro-Saoz, e sell da ziorren an ekonomiezh lec'hel.

War al leurenn ledan-se e vez roet buhez da deir zudenn gant Tagor. Ganto e vo kontet an istor a bep eil : Bimala, ur vaouez nevez euredet gant Nikhil, ur priñs pinvidik, ha Sandip, unan eus pennoù bras al

luskad Swadeshi. Teir unangomz ha tri savboent a ya d'ober steuñvenn ar skrid neuze. Bimala a zo plac'h ar gêr, hervez an hengoun. Hegredik ha dizesk. Ober a raio anaoudegezh gant ar bed a-drugarez d'he gwaz, un den fur anezhañ, desket ha doujus. Gantañ eo e vo lakaet e darempred gant Sandip, paotr an dispac'h hag ar vroadelouriezh indezat rik. Er penn kentañ e vo-hi boemet gant komzoù Sandip, a seblant dezhi dieuber hag hael-kaer. Drezañ e tifluk ar bed diavaez betek enni. Re ziwezhat e kompreno pegen touellus eo Sandip avat. Ha skoulmet an drama.

Puilhañ a ra ar metaforennoù romantel ha kevrinek dindan pluenn Tagor, ken e teu da vezañ un tammig stambouc'hus ar skrid a-wechoù. E genedelouriezh-se a zegas soñj eus skridoù lourennek e-giz *Kannenn ar c'hanennoù*. Yann-Varc'h Thorel en deus klasket reiñ da dañva yezh vlizidik Tagor oc'h ober gant gerioù pe droiennoù nebeut anavezet. Diaesoc'h a-se ar skrid, seul vui ma ne c'hoarvez ket kalz traoù en tu all d'an divizoù ha d'an unangomzoù diabarzh...

Mar deo kizidik ar mod da livañ an tudennoù, e chomont unvloc'hek betek re. Santout a reer diouzhtu en deus graet Tagor un dibab. Un den mat ha glan eo Nikhil, p'eo fallakr Sandip. Pilpous ha lorc'hus n'eo ken. War zigarez enoriñ e vro hag e bobl, n'eo angoulet nemet gant ar galloud, an arc'hant hag ar merc'hed. Tudenn Bimala a zo kemplezoc'h ha dedennusoc'h. Loveal a ra etre Nikhil ha Sandip. Emdreiñ a ra. Klask a ra he hent ha faziañ a ra...


Un levr talvoudus ha dedennus eo *Er gêr hag er bed* en desped d'e dechoù fall. Ur vrav a freskenn istorel, sokial ha bre-doniell eo, ha n'eo ket digoulzet e demoù. Stuz ar merc'hed er bed hag e Bro-Indez a zo livet kaer. E 1922 en doa skrivet Tagor kement-mañ d'ur mignon dezhañ : « En hor bro ivez, ur wech dieubet eus o hualoù disol, e tizho ar merc'hed o denezelzh en he leunded, hag ar baotred ivez, da neuze, a dizho o leunded ». Ar c'hudennoù relijiel a zo chomet bev-mat kenkoulz all. Er romant ez eus sach-blev etre hindouidi ha muzulmaned. Pouez ar bedelaat war ar produioù lec'hel a zo chomet ur gudenn a-vremañ, 'm eus aon.

Erfin, an doare ma c'hell bezañ direizhet uhelvennad un emsavadeg gant ur marc'h-blein displeal a zo diskouezet splann gant Tagor. Disfiz e tiskouez an aozer e-keñver nep ideologiezh : « mar klaskomp reiñ stumm

d'ar mad, evel pa vije ar mad un dra bennak danvezel, en do e zial, kriz : divuhez e yelo ». Peadra da hirbrederiañ war hor bed kempred.

MBdB

Galnys, pe Priz ar Gwad,
pezh-c'hoari e pevar arvest,
gant Yann-Fulub Dupuy,
An Alarc'h embannadurioù,
102 bajenn, 8€



Perak ar brezelioù ? Sed ar goulenn a oa broudet spered Yann-Fulub Dupuy gantañ p'en doa skrivet *Galnys, pe Priz ar gwad*. “Galnys” zo unan eus an tri ger chomet eus ur yezh kozh, tost d'ar brezhoneg, hag a veze komzet etre Kembre ha Skos betek an XIII^{vet} kantved. Gant ar ger-se e veze anvet ar sammad arc'hant a veze goulennet da zigoll digant familh ur muntrer gant familh an den lazhet. Ur mod da virout ouzh ar brezel e oa. Priz ar peoc'h neuze.

E pezh-c'hoari Yann-Fulub Dupuy, just a-walc'h, e vo kont eus ar galnys-se. Leurennet e

vez daou glann, er Grennamzer goshañ, bet brezelioù euzhus etrezo. Gwenvael Gaerleon, gwaz a lignez uhel, zo bet lazhet gant Olwenn Urien, ur vaouez eus ar c'hlan enep, e degouezhioù amsklaer...

Daoust ha disklêriet e vo brezel, pe e vo kompezet an traoù gant ar *galnys* ? Diouzh un tu, nerzhioù ar furnezh, ar poell hag an eñvor, diouzh an tu all, tan ar gasoni, ar yaouankiz, ar garantez... Peadra da gompren en hor bed kempred. Gwall zigemm dremm ar brezel...

N'hellfen ket mont pelloc'h amañ anez reiñ avel d'ar c'had...

Rak pezh-c'hoari Yann-Fulub n'eo ket bet savet evel un hir a varc'hatadenn unton ha borodus etre daou glann. Darvoudoù dic'hortoz a zeu da lakaat brall en tabutoù, gant un tamm fent gwezhioù zo.

Turgnet brav em eus kavet an itrik. Evel er pezh-c'hoari *Re an tu all*, ez eus anv eus ur linenn arouezel : ar roudouz, strizh ha risklus, etre an daou glann hag etre daou ved. Mont en tu all n'eo ket un ebat. Priz ar frankiz eo avat. Tem ar gevelle-rezh en deus tennet splet Yann-Fulub anezhañ evit mad ar steuñvenn. Degas a ra un elfenn

zic'hortoz ha kevrenus. Soñjal a ran e komzoù Bram Van Velde : « Daou e vezomp atav, unan bev, unan marv »...


Mall zo ganin gwelout ar pezh war al leurenn, gant strollad Tro-didro, rak ul lodenn eus ar pezh zo war gan, a-drugarez d'ar sonaozour Jean-Yves Le Venn, ha gant sikour Kanerien Sant Meryn. Hag, evel-just, ar c'hoariva zo ar c'hoariva !

Displeget eo bet Galnys pe Priz ar Gwad evit ar wech kentañ d'ar 24 a viz Meurzh 2018 e C'hoariva Max Jakob e Kemper.

MBdB

Olla Vogala, L'histoire de la langue des Flamands en France et ailleurs,

gant Wido Bourel,
Yoran embanner,
160 pajenn, 9€



Ul levr diwar-benn istor ar Vlaams, ar yezh komzet el lodenn eus Flandrez bremañ er C'hwec'hkorn eo al levrig-mañ. Divyezhek nederlandeg/galleg eo. Buan e lenner al levr. Ur

bern traoù dedennus a gaver ennañ. Da gentañ, un alberz eus istor ar yezhoù germanek komzet e gwalarn Europa adalek ar bloavezh 400 goude JK, o diforc'hioù hag o c'herentie-

zhioù. En o zouez, yezh ar Franked a vefe mamm-yezh an nederlandeg hag e rann-yezhoù evel ar Vlaams. Mat eo gouzout e oa ar yezh-se an hini a gomze Chlodowezch (Clovis ar C'hallaoued). Charlez Veur a gomze ar memes yezh en diavaez eus al latin. Adalek ar bloavezhioù 600 e kaver roudoù skrivet eus yezh ar Franked. Unan eus an testennoù kentañ en hennederlandeg a vefe bet skrivet war-dro 1100 gant ur manac'h eus abati Rochester er c'hKent a orin eus Saint-Omer, bremañ er C'hwec'hkorn « *Hebban olla vogala nesta hagunna / Hinase hic enda thu / Unat unbudan uue nu ?* » (An holl evned o deus graet o neizh / Nemet te ha me / Petra a c'hortozomp ?). Lâret 'vefe un doare haiku...

Pouezañ a ra Wido Bourel war ar fed ne glot tost james tiriad ur Stad gant tiriad ur yezh. Prederiadennoù dedennus a gaver war an darempred etre yezh standart ha rannyezhoù. Difenn a ra groñs an aozer an dibab bet graet gant ar vlaamsegerien d'ober gant an nederlandeg evel yezh standart hep koll pinvidigezh ar rannyezhoù evel just. Anat eo evitañ ez eo abegoù


ideologel a vount tud zo da lâret ez eo vlaams ar C'hwec'hkorn ur yezh distag.

Lodennoù zo eus an oberenn a c'hell magañ ar preder a-zivout ar brezhoneg pe rannyezhoù alamanek Elzas, eta.

Istor, danvez preder, ul levr lennadur fonnus a-walc'h. Ul levr a dalvez ar boan lenn...

HL

**Penaos eo marvet
Yann Pilhaouer ?, Saga
Arvorika - levrenn I ,
gant Yann-Bêr Kemener,
Skol Vreizh,
130 pajenn, 12€**



Marv eo Yann Pilhaouer e degouezhioù disfizius. Gwallzarvoud pe dorfed ? N'oufed ket lâret... Met an dud, e-tro Bodveur, n'int ket prest da c'hervel beg e dog... Yannig, Mab Yann, a yelo war ar vicher pilhaouer da heul e dad. C'hoant en deus da gompren petra zo c'hoarvezet e gwirionez, an deiz-se, ma oa bet kavet e dad astennet war mein begek naoz ar stêr, goude ma vije kouezhet a-ziwar ur pontig lampr.

War zigarez dispenn roudoù Yannig Pilhaouer e vo desket deomp doareoù ar vicher gozh-se ha gizioù all ar vro e penn kentañ an XX^{vet} kantved. Romant du ha romant roz war ar memes tro. Du, rak diskouez a ra an aozer, Yann-Bêr Kemener, ur vuhez kriz, ma 'z eus, gwellaet gant spered kenskoazell izili kumuniezh ar bilhaouerien. Soñjal a reer amañ e freskennoù

istorel Daniel Cariou pe Jean Failher. Roz, rak gant istorioù karantez e vez lakaet ur meudad pebr er geusturenn. N'int ket eus ar soutilañ moarvat, hag ar wech-mañ e soñjer kentoc'h e romantoù tiez-gar...

Penaos eo marvet Yann Pilhaouer ? n'eo ket un oberenn lennegel, evit lavaret gwir, na pegen c'hwek bennak e ve yezh an aozer, met ul levr dedennus eo e meur a geñver, evit an dibenn-sizhun, e-giz ma vez lavaret. Lennet e vo gant dudi gant ar grennarded, gant tud o klask gouzout hiroc'h diwarbenn buhez ar bilhaouerien gwechall, ha gant nevez lenne-rien o klask skridoù brezhoneg yac'h hag aes.

MBdB

Pennogio,
gant Paskal Hervio,
Keit Vimp Bev,
92 pajenn, 6€



Piv n'anavez ket avanturioù *Pinocchio*, levr hollvrudet ar skrivagner italian Carlo Collodi. Geppetto, an den mat-se, en deus lakaet en e benn kizellañ ur vargodenn goad gouest da zañsal ha d'ober lammoù-faraon. Ar memes istor a zeu dindan pluenn Paskal Hervio d'ar c'hentañ gwel. Nemet du eo e vargodenn. Aozet eo bet diwar koad ebena. Tremena ra an istor en Afrika, ha neket en Itali. Pinocchio a zo deuet da vezañ Pennogio, ha Geppetto zo troet e Djamelito. An itrik n'eo ket cheñchet avat, ha fri Pennogio a zo gouest da hiraat ken aes hag hini Pinocchio pa vez o liveañ gevier. Perak cheñch leurenn neuze ? Evit degas temoù nevez ha lakaat ar vugale d'en em soñjal. Kudenn ar vonelouriezh hag an divroañ a lenner en neu-dennoù. E-lec'h berniañ war ur

c'hozh penton, en em gav ar repuidi e-barzh kof ur balum, e fin an abadenn, e-ser Pennogio, deuet da vezañ ur paotrig kig hag eskern, ha kalonek. Ar mennozh a zo mat. Mat e vije bet mont un tammig pelloc'h gant an temoù degaset gant Paskal Hervio moarvat, evit gwiadiñ da vat ar steuñvenn nevez. Met plijout a raio d'ar vugale evel m'emañ, sur a-walc'h. Gwell a-se, ma vezont broudet da lenn !

MBdB

Distro Jarl eus ar brezel,
gant Goulc'han Kervella,
Skol Vreizh,
144 fajenn, 12€



Jarl, ar paotr yaouank-se, a zo bet gloazet fall war an talbenn e-kreiz ar c'hentañ brezel bed. Graet eo bet war e dro, gwellañ ma c'halled, en ospital an arme, met kollet en deus ur c'har hag ul lagad. N'eo ket mat d'ober brezel ken. Kaset eo d'e vro c'henidik en-dro, da barrez kozh Tremenac'h, war porzh ar C'ho-rejoù. Ne oar ket mat penaos e vo degemeret gant e zous, distummet m'eo-eñ bremañ, na gant an dud ivez, hag a zo techet da welout a-dreuz ar re o deus saveteet o buhez, p'eo bet lazhet kement a wazed eus ar vro. Ar baotred yaouank tro-dro, a zo o c'hortoz gant mall an oad da vont da vrezeliñ e-giz o breudeur, c'hoant ganto da zifenn Bro-Frañs, penn skañv anezho, tommet o spered gant ideologiezh ar brezel, an emaberzh hag an harozegezh... Diskouezet mat en deus Goulc'han Kervella

pegen diaes e c'hell bezañ dont en-dro e-touez tud ha n'o deus ket anavezet ifern ar brezel, ha ken diaes all d'un den marc'hagnet-vil toullañ e hent er vuhez, en ur bed m'eo tenn ha korfel labour an douar ha labour ar bezhin. Evit entanañ e zanevell e kont deomp an aozer karantez foll ha gwarizi diroll e benndu-denn. Un drajedienn diremed evit tañva ur prantad amzer kriz ha skrijus. Adkavout a reer pluenn ampart Goulc'han Kervella. Plijout a ra din lenn pajennoù zo a vouezh uhel, ken c'hwec e kavan e yezh. Donezonoù paotr ar c'hoariva : ur yezh vuhezek hag un istor kontet brav, gant *suspens* forzh pegement. Ne vo ket lakaet Jarl hag e zous tal-ouzh-tal a-raok ar bajenn 51-52, da skouer. Peadra da lakaat Yann lenner war ar glaou ruz. Livet kaer eo ar vro hag ar vuhez e penn kentañ an

XX^{vet} kantved. Techet eo Goulc'han Kervella da vont un tammig amplik war ar poent-se marteze, c'hoant gantañ meskañ pedagogiezh ha lennegezh marteze. Ken e vez gorrekaet an dezrevell, ha kollet penn an neu-

denn gwezhioù zo, na pegen dedennus bennak e ve ar pezh a zesker war ar memes tro. Met lennegezh ha pedagogiezh a zo daou...

MBdB


Encyclopédie de la Bretagne,
Église, Religion, Croyances
du Moyen-Âge à nos
jours (vol. 4),
 dindan renerezh F. Morvan,
 424 fajenn, 24,90€,
Celtes et celticisme (vol. 5),
 gant P. Jouet, G. Hily, D.
 Boekhoorn, C. Gauthier,
 F. Labbé, E. Chartier,
 388 pajenn, 24,90€

Setu moullet div levrenn all eus an holloueziadur gouestlet da Istor Breizh. Ur raktres bet kaset da benn gant ar C'horsad Tony Sabiani. E galleg int bet skrivet evel-just met pa ouezer ne vez ket kelennet istor Breizh tamm ebet tost da vat en hor skolioù eo a bouez bras kaout seurt holloueziadur.

Al levrenn *Église, Religion, Croyances du Moyen-Âge à nos jours* a zo bet kenurzhiat gant Frédéric Morvan ha skoazellet eo bet gant un ugent oberour

all. Fonnus ha lieseurt an testennoù bet studiet gant an aozerien : sentvuhezouriezh ar Grennamzer ha buhez ar sent er Grennamzer, abatioù Breizh ha dreist-holl hini Landevenneg, Boporz. Studiadennoù pizh (gant Hervé Martin) a zo war darempredoù dugged Breizh ha Roma en XII^{vet} betek ar XVI^{vet} kantved.

Eil lodenn al levr a zo gouestlet d'ar c'hredennoù, d'al lidoù, d'ar pardonioù, ar c'halvarioù hag an disivouderezh (*héréd-*



sie) e Breizh. Anv zo eus Eon de l'Etoile evel-just.

Kaoz a zo ivez eus an Tad Maner (1606-1683), Dom Mikael an Nobletz (1577-1652) en trede lodenn gant Fañch Morvannou.

Al lodenn ziwezhañ a zo gouestlet d'ar relijion etre an XIX^{vet} hag XXI^{vet} kantved e Breizh. Fañch Postic a lak ar gaoz war strivoù bet graet gant François Cadice (1864-1929) evit reiñ skoazell d'ar Vretoned harluet e kêrbenn Bro-C'hall.

Celtes et celtisme a zo bet aozet evit an drederenn eus al levrenn gant Philippe Jouet hag anv zo gantañ eus an hengoun keltiek. Danvez puilh, fonnus c'hoazh aozet evit ul lodenn gant François Labbé, Claudine Gauthier hag Erwan Chartier.

Kaoz zo e penn kentañ eus an drouized e Gallia, en Iwerzhon (eno e kaver ar pep brasañ eus an dielloù) e Kembre, peseurt roll a oa gante e kevredigezh ar Gelted. Kalz a zo da zeskiñ war donedigezh ar Vretoned en Arvorig war-dro ar V^{vet} kantved. Diaes alies didoueziañ ar wirionez diouzh ar vitologiezh. Ken dedennus all eo gouzout peseurt darempred a oa bet etre an Arvoriz ha tud Kerneveur. Anv zo ivez gant P. Jouet

eus anvioù tud a zo bet a-vis-koazh meneget pa 'z eus kaoz eus Kelted : Macsen Wledig, Konan Meriadeg.

Erwan Chartier a lak ar gaoz war an etrekeltiegezh. Daou bennad a zo gouestlet da Henri Gaidoz, aozer ar c'helaouennoù *Revue Celtique* ha *Mélusine*.

Dimitri Boekhoorn en deus studiet al loened el lennegezh keltiek.

E dibenn al levr ez eus anv eus un toullad skolveurien a zo bet a-bouez pa 'z eus kaoz eus Studioù war ar C'heltieg : *La Tour d'Auvergne*, Henri d'Arbois de Jubainville, Henry Gaidoz, Joseph Loth, Henri-Georges Dottin, Pierre le Roux, François Falc'hun. Anv ebet eus Léon Fleuriot na Per Denez, iskis !

TH



> Bremañ (421)

Teuliad niverenn 421 **Bremañ** a zo gouestlet d'ar yezhoù minorelaet en tiez-kêr. Ha resisoc'h en tiez-kêr e Europa ma vez ur gwir bolitikerezh lies-yezhek. E reter Europa e vezer kustum d'ober gant meur a yezh, ha setu perak e lenner daou bennad, an eil diwar-benn Szentgotthárd (Hungaria) hag egile diwar-benn Lendava (Slovenia), peadra da voueta enklask

Ana Sohier. Homañ he doa goulennet kavout skouerioù eus politikerezh pannellerezh divye-zhek efedus. E Bro-Gembre e kaver ivez ur festival aozet gant ar servij a ra war-dro politikerezh yezh ar vro. Hag e Breizh e kaver skouerioù efedus, evel e Pluguen, ha pa vefe ret chom war evezh atav.

Er rann *Soñj & disoñj* ez eus kaoz eus krouidigezh kentañ skolaj Diwan, eus ar film greunlandek kentañ (gant Jacob Gronlykke) istitlet e daneg, pe c'hoazh eus stourm bed arzourien amatour sevenadur Breizh.

En e gronikenn *N'eus netra skianteloc'h !* e skriv deomp Tangi Legavre diwar-benn al lezenn nevez « 80km » hag a

ziskouez “splann” an diouer a c’hwiled war ar maezioù !

El lodenn *Bremañ er bed* ez eus kaoz eus ar mediaoù publik e Suis, e-lec’h ma oa bet votet gant pobl Suis kenderc’hel da arc’hantaouiñ ar skinwel hag ar radio publik gant un taos. Peadra d’en em soñjal diwar-benn hon hini deomp-ni !

Un hir a bennad a lenner er pajennoù *Anavezout ar bed*. « Karl Marx, bev bepred ! » an titl anezhañ. Evit lidañ eil kantved e c’hanedigezh (5 a viz Mae 1818) e c’haller (ad)dizoloiñ an den hag e hent war-zu ar gomunouriezh, met ivez kompren ar perag eus an titl-se, pa ’z eo deuet da vezañ ken dister levezon ar Strollad Komunour en deiz a hiziv.

El lodenn *Bremañ e Breizh* e reer anaoudegezh gant ur paotr unnek vloaz, Solal e anv. Evit kenderc’hel d’ober gant ar brezhoneg eo bet rediet da vont en ur skolaj m’eo bet digoret ur c’hlasad divyezhek nevez gant 7 eurvezh brezhoneg evit 5 bugel dre ma oa bet serret ar c’hlasad en ur skolaj all ma oa sañset mont evit heuliañ e vreur. 14 eurvezh a vrezhoneg evit 30 skolajiad a oa er c’hlasad-se ! Marteze e vo kavet ur pennad

all diwar e benn war *Dispak*, ar media nevez e brezhoneg hag en linenn penn-da-benn a zizoloer er pajennoù-se ivez.

Dismantrañ savadurioù a zo bepred ur ranngalon evit tud zo. El lodenn *Bevañ e Breizh* e lenner ur pennad un tamm blaz “gwelloc’h e veze a-raok” gantañ, diwar-benn un davarn, deuet da vezañ arouez istor ur c’harter e Brest. Kaoz zo ivez eus ar re yaouank, liseidi ha skolajidi Diwan, hag o stourm evit dazont o yezh.

Er pajennoù *Sonerezh, sinema, c’hoarioù* e lenner ur pennad diwar-benn ugentvet fest-noz Yaouank : un digarez brav da gomz diwar-benn aozourien fest-noz brasañ ar bed ! Ur pennad-kaoz a lenner ivez gant Tangi Merien ha Klet Beyer, o deus prestet o mouezh da dudennou pennañ ar film-bevaat diazezet war labour Kris ha Davodeau evit al levr bannoù-treset *Un homme est mort*.

Echuiñ a ra an niverenn, evel kustum, gant rekipecoù da zizoloiñ ha da lakaat ho mignoned da dañva !

JO

> **Al Lanv (145)**

War golo ar gelaouenn trimiziek **Al Lanv**, niv. 145, emañ poltred ar skipailhad liseidi o doa stourmet evit ma vije arnodenn ar matematikou e brezhoneg. Nac'het e oa bet evel-just ha memestra e oant aet dreist d'an difenn hag aozet o foelladenn e brezhoneg. Charlie Grall en deus savet ur pennad diwar-benn digasted ha dispriz ar Stad c'hall evit hor yezh. Gant C. Grall ivez e c'heller lenn pempvet ha diwezhañ pennad diwar-benn e vignon Martial Menard hag en-dro-mañ ez eus anv eus ti embann *An Here* hag al levrioù niverus lakaet war ar

marc'had evit yaouankiz Breizh dreist-holl.

Paol ar Meur a gont deomp en un doare plijus-tre e droidad war enez Skellig Mikael e mervent Iwerzhon, ul lec'h pirc'hirinañ e oa bet ha kavet e vez eno c'hoazh logelloù kelc'hiek e mein savet mod an IX^{vet} kantved. Pol-Yvon Virot a oa bet e Ho Chi Minh e Bro-Vietnam ha klasket gouzout petra a chome eus ar reveulzi etrebroadel da vare kantvet deiz-ha-bloaz an dispac'h e Rusia.

Ur pennad « Ur skol evit ar Wadaabe » e tispieg A. Gleoneg penaos ez eus bet savet skolioù evit Ar Wadaabe, ur meuriad mesaerien kantreidi a-drugarez da labour ha pennegezh ur c'houblad Bretoned bet o kantren e norzh Niger.

Un troc'h-kaoz a zo ivez gant Carl Morris, un arbennikour war ar media e Bro-Gembre.

Padrig an Habask a lak ar gaoz war *Eurokorrika* savet nevez zo, un emglev a zo bet sinet etre dileuridi redadegoù pe danvez redadegoù ar yezhoù-mañ : euskareg, galiseg, katalaneg, okitaneg Aran, okitanek Bearn, brezhoneg, kembraeg, gouezeleg Iwerzhon hag elzaseg.

Ar pal a zo sevel oberoù pleustrek a-gevret.

Ur gevredigezh nevez a zo bet savet ivez *Raok* e anv. Displegañ a reer deomp peseurt pal a zo gant izili *Raok*. Un emglev-bro war dachenn ar brezhoneg eo. Kenlabouret e vo gant ar frammoù kelenn, ha klasket efedusaat al labour hag ar c'hehentiñ. Dav bodañ an nerzhioù evit kaout muioc'h a efedusted, emezo. Klasket 'vo ivez sevel un endro ekonomikel en-dro d'ar brezhoneg.

Lenn a c'heller ivez el lodenn lennegel lodenn gentañ un dane-

vell gant Kristian Braz : *Feunteun Santez Diboan*.

El lodenn e korn ar stalenn e tispleg Daniel Doujet e kaver div destenn disheñvel eus sorbiennoù Loeiza ar Meliner. Dibabet en deus ar sorbienn *C'hoari ar Gwennili* embannet ar wech kentañ er gelaouenn *Dihunamb* e 1908 hag goude-se en dastumad *Ar bont er velin* e 1938 ha diouzh lenn an div destenn e weler int disheñvel-mat.

TH

> Le Peuple Breton (657)

Bev eo ar faskouriezh e Galiza c'hoazh, setu titl ar pennad kentañ a c'heller lenn e lodenn vrezhoneg ar gelaouenn. Klevet ez eus bet kaoz eus Katalonia war an diwezhadoù met daoust ha klevet 'peus komz eus stourm tud Galiza a-enep ar Stad spagnolat ? Sed aze danvez pennad Robert Neal Baxter. Reiñ a ra skouer ur maner bet profet da Franco gant ar pobl, sañset. Perc'henn eo familh an diktatour war ar maner-se met lod stourmerien, difeuls avat, a



c'houlenn e vije rentet an takad-se da bobl Galiza. Emañ c'hoazh glad ar vro etre daouarn familh an diktatour.

« Chom a ra kalz d'ober evit skarzhañ skeud ar faskouriezh diouzh ar vro hag evit ma c'hello an holl bobloù a vev c'hoazh dindan beli Spagn unvan bevañ e frankiz, » eme R. N. Baxter.

Gant Paol ar Meur ez eus kaoz eus ul levr a bouez a oa bet embannet e 1970 gant Bernard Lambert : *Les paysans dans la lutte des classes*. Ne oa ket a-du gant an FNSEA a lavare e oa ret kreskiñ an atantoù, produiñ muioc'h evit bastañ da ezhommoù an ekonomiezh kapitalour.

Ur pennad berr a zo ivez diwar-benn ur genstrivadeg aozet gant *Dour ha stêrioù Breizh / Eau et rivières*. E galleg hag e brezhoneg e vo gallet skrivañ diwar-benn an evned dour. Evit gouzout hiroc'h e c'heller mont war lec'hienn internet *Eau et rivières*.

An eil pennad berr a denn d'an teknologiezhoù nevez. Deskiñ d'ar mekanikoù komz evel ma ra an dud eo titl ar pennad-mañ. D'an 13 a viz Mezheven e oa bet digoret *Mozilla Common Voice* d'ar brezhoneg. Ul lusker anaouedegezh ar vouezh a zo lakaet da bal pennañ. Dav da gentañ penn dastum ur c'hementad bras a enrolladennoù. 10 000 eurvezh

enrolladennoù bennak a zo ezhomm. Kement brezhoneger ampart a vije dedennet a c'hell kemer perzh er raktres.

Tri levr a zo bet burutellet gant Hervel Lannuzel en e bennad *Du ha Gwenn ha plas da lenn : Hudour burzhudus Oz* gant Lyman Frank Baum ha lakaet e brezhoneg gant Mari Elen Maze, embannet gant *Aber ; Kêr-benn al loar*, gant Sonz hag Arnaud Boutle, lakaet e brezhoneg gant Morgane Cotten hag embannet gant *Embannadurioù Gaoter* hag evit klozañ *Moutig ar riboter* gant Yann Bêr Kemener, embannet gant *Skol Vreizh*. Lenn a c'heller ivez un diverrañ eus ar pezh a gaver e-barzh niverenn 429 *Al Liamm* gouestlet da Vro-Gembre.

TH

> Bro Nevez (147)



Er c'hannadig-mañ e c'heller lenn keleier Breizh e saozneg penn-da-benn. Kaoz a zo evel-just eus urzh an Erminig evel bep bloaz, eus Ar Redadeg, eus Festival an Oriant hag ivez eus un den aet da Anaon nevez zo : Yvon Palamour (1932-2018), kalvez brudet e oa, bet desket e vicher gantañ e skol Boulle, telennoù en doa graet evit tad Alan Stivell, Jord Cochevelou.

Roet en doa lañs da bagad Pluvigner ivez. War e leve e oa kroget da studiañ pizh arrebeuri kozh Breizh ha lakaet embann gant e geneil André Le Bars : *Meubles peints de Bretagne – monochromes ou polychromes*.


Ur pennad all a zo diwar-benn Jean-Yves Le Corre aet da Anaon nevez zo ivez. Soner akordeoñs ampart hag anavezet mat e Kreiz-Breizh evel soner e strollad Diaouled ar Menez.

Pennad Jean-Pierre Le Mat en e rubrikenn *Deep inside a Breton skull* a zo diwar-benn ar sifroù : *Breton numbers*.

Ul lodenn vras eus ar c'hannadig a zo gouestlet d'al levrioù embannet e galleg ha d'ar pladennoù embannet e Breizh.

An diell en-dro-mañ a zo *A Travel Account of Brittany from 1925 – Some American Connections*. Ur skrid savet gant un tourist amerikan, Elizabeth Shackleton.

TH



Annaig KERVELLA
Tudual HUON

HOR MIGNONED

Kañv :

Aet eo Rita Morgan Williams da Anaon. Mignonez vras e oa da Naig Rozmor. Tri fennad he doa bet skrivet el *Liamm* : *Kelenner doujet, mignon ker* e 2004 en niverenn 345, e koun Ronan Huon ; e 2012 en niverenn 390 *Un emgav gant Per Denez* hag e 2014 en niverenn 403 *Eil emgav gant Per Denez*.

Savet he doa geriadurioù kembraeg-brezhoneg / brezhoneg-kembraeg (*Geiriadur Bach Llydaweg-Cymraeg* ; *Geiriadur Cymraeg-Llydaweg*) ha graet troidigezhioù eus ar brezhoneg d'ar c'hembraeg (*Brezhoneg Buan hag Aes*, doare kembraek ; *Morforwyn (Mari Vorgan gant Roparz Hemon)* ; *Kaurentina, Brenhines ei Galon (Rouanez e Galon)*, *Menyw Dda (Ur Vaouez Vat)* gant Roparz Hemon, *Storiâu Tramor 2*, ren. Bobi Jones, Gwasg Gomer, 1975.

Kolier an Erminig a oa bet roet dezhi e 1996.

Aet eo Yann-Bêr Duval da Anaon d'ar 25 a viz Gouere. Meur a garg en doa sammet war e chouk e bed sevenadurel ar vro : bet 'oa sekretour *Al Leur Nevez*, prezidant *Tiez Breizh* ha *Dastum Kreiz Breizh*, kelenner brezhoneg... Ezel e oa eus ar strollad politikel UDB.

PROFOÙ

Miz Even : Ti ar Brezhoneg

— War un dro : 15€

Miz Gouere : Michel LESCOP ; Sylvie AR MOAL ; Mikael ROUBY ; Yann-Bêr RIVALIN ; Marie-Rose PIPET ; Yann-Varc'h COCHET ; Jean BOULBRIA ; Goulven DONVAL ; Claude LANCHEC ; Michel LE ROY

— War un dro : 230€

Miz Eost : Paul AUFFRET ; Armel LE SEC'H ; Jean-Yves LE GOFF ; Glaodig LIABEUF-LE MAGUER ; Jean-Camille HANUS ; Daniel DOLLE ; Gweltaz ADEUX ; Jean-Michel MAHE ; Loik CHAPEL ; R. F. CARRE ; Daniel CARRE ; Yves MERVIN ; Drian BERNIER ; Servane DOUALIN ; Per LAVANANT

— War un dro : 241€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn
d'hor skoazellerien.*

GOUEL AN ERMINIG

D'an 11 a viz Eost, da geñver Gouel Etrekeltiek An Oriant e oa bet aozet Kolier an Erminig. Er bloaz-mañ e oa bet loreet : Gwyn Griffith, Yann Talbot, Jorj Cadoudal, Herve ar Beg. Diwar ar pevar

den loreet, daou anezho a oa aet da Anaon er bloaz-mañ. Ne oa maouez ebet war ar renk.

Gwyn Griffith a oa bet ganet e 1941, kelaouenner a vicher e oa ha labouret en doa evit *BBC Cymru*, dedennet bras e oa gant Breizh hag he sevenadur. Tri levr en doa skrivet e kembraeg diwar-benn Breizh : *LLydau ei llen a'i llwybrau*, *Crwydro llydaw* ha *Sioni Winiwns* (gw. pennad H. Latimier war *Al Liamm* 429). Deuet e oa e vab Richard hag e wreg Gwen betek An Oriant da zegemer kolier an Erminig.

Yann Talbot a oa ganet e 1940. Beleg e oa ha kelenner e-pad meur a vloavezh e Rostrenenn. Ur bern skridoù ha troidigezhioù diwar e bluenn e c'heller lenn war kelaouennoù evel *Al Liamm*, *Al Lanv*, *Imbourc'h*. Prezidant *Kuzul ar Brezhoneg* e oa bet ivez. Deuet e oa e c'hoar da zegemer kolier an Erminig. (gw. pennad H. Latimier, *Al Liamm* 428).

Jorj Kadoudal a zo bet ganet e 1929 hag anavezet mat e Breizh evel soner biniawoù. Gantañ e oa bet krouet kevrenn Rostrenenn, kelc'h ha bagad Boulvriag. Klevet e veze o seniñ gwechall er festoù-noz gant e gomper Etienne Rivoallan. Difenn ar brezhoneg, ar vuhez war ar maez, ar beizanted vihan, sevenadur Breizh a oar ober ivez.

Herve ar Beg a zo bet ganet e 1951 hag ur stourmer anavezet mat Breizh eo. Labouret en doa evit aozañ ar gelaouenn *Evit ar Brezhoneg*, stourmet er strollad *Emgann* evit difenn gwirioù ar Vretoned. Labouret en doa gant *Radio Kreiz Breizh* etre 1984 ha 2000 ha goud-se e *Radio Arvorig* adalek 2003 betek ar mare m'eo aet war e leve e 2018.

EUS GWENED DA AFRIKA, SALOÑS AL LEVRIOÙ ER GÊR GOZH ____

Un devezh kaer a viz Even.

Atav e vez plijadur o vont da vale d'ar Sadorn pe d'ar Sul. Brav an amzer, tomm an heol, hinoniñ a ra setu graet e soñj gant Yann, ne vo ket hirie oc'h abuziñ e amzer er gêr ! « Ha ma 'z afemp d'ober un droiad e Gwened » emezañ d'e vignonez ? « Greomp »,

emezi, « un devezh kaer e vo, Saloñs al Levrioù e Breizh eo ouzhpenn-se hirie, Livr' à Vannes-Levr e Gwened ».

Ha ne lavare-hi ket gevier. Ur Saloñs eo a vez dalc'het bep bloaz e Gwened abaoe un toullad mat a vloavezhioù. Setu ma veze gwelet, d'an 9 ha d'an 10 a viz Even, en o sav dindan mogerioù ar gêr gozh ha gwenn-kann dindan an heol, un nebeud teltennoù hir ha ledan, enne plas a-walc'h evit degemer skrivagnerien ha tiez-embann e-leizh.

Prezegennoù, kaozeadennoù, levrioù en gwerzh gant oberourien a bep seurt, lod brudet meurbet ha lod all nebeut anavezet, setu ar pezh a oa da vezañ klevet ha kavet er saloñs-se.

Ul levr e brezhoneg



Ne oa ket bet ankounac'haet ar brezhoneg ha reizh e oa ken e oa, rak, arabat disoñjal memestra e veze graet eus ar saloñs-se, un amzer zo bet, *saloñs al levrioù e brezhoneg*. Ur priz d'ul levr e brezhoneg a vez roet pep bloaz eno neuze gant *Emglev Bro Gwened* ha *Skol Uhel ar Vro (Institut Culturel de Bretagne)*. Graet e vez un dibab etre meur a levr savet e-pad ar bloaz tremenet. Ha setu aet ar maout e 2018 gant Lan Tangi hag e levr *Afrika*, embannet gant *Skrid* ha lakaet en gwerzh gant *Kuzul ar Brezhoneg*. Profet 'z eus bet da Lan un daolenn gaer, unan eus engravadurioù Jeanne Malivel.

Ur brezegenn hir e brezhoneg en deus graet Lan Tangi ma tisplege perak ha penaos a oa bet savet gantañ e levr, ennañ pennadoù ha lizheroù bet skrivet d'e dad hag d'e vamm pa oa, en-yaouank, o foetañ bro en Afrika. Souezhet ez eo bet lod eus an arvesterien o klevet brezhoneg flour a-glev d'an holl ha dirak “pennoù-bras” ar “*société littéraire locale et parisienne*”...

E galleg ivez

Estroc'h evit tud vrudet ha brezhonegerien ampart a gaved er saloñs avat. Bretoned yaouank ha kozh, gallegerien anezhe, a oa deuet ivez da ginnig o oberennoù nevez, evel Ronan Robert, da skouer, ur Bigouter anezhañ, bet savet gantañ un istor kaer, plijus ha leun a faltazi : *L'Abeille Noire*.

Kenavo an distro !

Setu neuze penaos ez eas an traoù en-dro e Gwened, etre barradoù heol ha barradoù glav, e galleg hag e brezhoneg, e bed burzhudus al levrioù...

Deuit a-benn bloaz, ma fell deoc'h, evit ur Saloñs al Levrioù all hag evit gwelet c'hoazh ur priz roet eno d'ul levr e brezhoneg !

Paskal Tabuteau

PRIZ LENNEGEL STEN KIDNA _____

D'an 9 a viz Even, e mediaoueg An Alre, e oa bet roet Priz Kreizenn Sevenadurel Sten Kidna da vMich Beyer evit he romant *Troiad en Ifern*, bet embannet gant *Embannadurioù An Alarc'h* e 2017.

AI'TA ! UR STAL ENLINENN _____

Emañ *Ai'ta !* o paouez reiñ lañs d'ur stal en linenn. Enni e vo kavet peadra da vrezhonekaat ar panelloù hag a bep seurt traoù all. Lec'h ma 'z eus galleg e c'hellit pegañ ur skritell e brezhoneg (da skouer : kenweturañ, Lezit da dremen, Takad 30, Bepred)

Er stal-se e c'heller prenañ produioù *Aplud*, *Ar Redadeg* pe *Breizh 5/5*.

Dizale e vo kavet daou begsun da lakaat war ar poubellennoù ivez.

Adalek kampoù kentañ KEAV er bloavezhioù 50 ez eus bet bugale o tont gant o zud hag e veze aozet obererezhioù evite. Abaoe pell e soñjemp e rankemp mont pelloc'h hag adalek 2013 ez eo bet sklaeroc'h c'hoazh an ezhomm da lakaat ar raktres da zont da wir ha savet hon eus ar c'hentañ rummad « Brezhoneg er familhoù » e-pad ar staj-hañv, se 'oa bet pazenn gentañ hon strivoù. Distroomp memestra war an doare ma tiwanas ar raktres-se : an doare da dreuzkas ar yezh a oa e-kreiz hor preder abaoe pell ; ne oamp ket hon-unan avat, meur a vro tost deomp abalamour da stad o yezh, Kembre, Bro-Skos, Euskadi da skouer, o doa kroget da soñjal eveldomp ne oa ket a-walc'h kaout skolioù pe egin ur vuhez foran en o yezh. Ret e oa adskoulmañ gant an doare naturel ha treuzkas ar yezh er familhoù, a rumm da rumm evel gwechall.

Neuze, petra a oa pal ar rummad « Brezhoneg er familhoù » ? Reiñ fiziañs ha nerzh kalon da dud ar vugale a oa e soñj da sevel o bugale e brezhoneg. Penaos ? Soñjet hor boa bodañ asambles ar familhoù-se hag o bugale en ur rummad evit ma renfent o buhez pemdez e brezhoneg hag e brezhoneg hepken. Arnodiñ e c'haller bevañ e brezhoneg da vat paneveken evit lod. Gwelet n'emaint ken o-unan. Bezañ niverus ivez a sikour, nerzh ur strollad a gont kalz. Meskañ ar vugale hag o zud a oar brezhoneg tamm pe damm gant familhoù a gomz brezhoneg aes a zo un doare efedus d'ober anaoudegezh, da grouiñ liammoù, da aozañ eskemmoù ha kaout kensikour. Deskiñ ar yezh a ranker ober ivez, ar gwellañ ma c'haller, pa ne vestronier ket ar yezh e sav ur bern diaesterioù ouzhpenn. : yezh an trivliadoù da skouer. Prederiañ asambles, rannañ o skiant-prenet, gouzout peseurt diaesterioù o deus bet, peseurt diskoulmoù o deus kavet p'o deus kavet un diskoulm, petra n'eus o sikouret (hiniannoù pe aozadurioù), pourchas dezhe binvioù (levrioù, pladennoù filmoù, abadennoù skinwel...) respont d'ar goulennnoù mar bez gellet, sikouret omp bet war ar poent-se gant ar gevredigezh *Divskouarn*. Setu ul lodenn eus al labour da gas da benn. Gouzout a reer pegen diaes e c'hall bezañ kregiñ da gaozeal e brezhoneg er ur familh pa oa bet kroget gant ar galleg da skouer.

War an dachenn, en un doare pleustrek penaos e tremen an traoù e-pad staj an hañv ? Div blac'h, Sophie Pochet ha Florence Viol a zo e karg eus ar rummad-se abaoe an deroù, war o chouk emañ ar braz eus al labour. O roll kentañ a zo krouiñ un endro ma c'hall an holl bezañ en o aes a-raok. Aozañ c'hoarioù etre ar vugale, evite d'ober anaoudegezh an eil re gant egile, hag ivez c'hoarioù gant ar vugale hag o zud asambles, mont da bourmen, kanañ, dañsal, selaou kontadennoù, ober labour dorn, aozañ beilhadegoù...

War ar memes tro e voe roet lañs d'un enklask gant Hughes Pentecouteau eus Skol-Veur Roazhon 2. Anavezout gwelloc'h ezhommoù ar familhoù ha bezañ gouest, da respont d'o goulennnoù, setu ar pal merket. An disoc'h a c'haller lenn war hon lec'hienn (keav.bzh/images/pdf/Studiadenn-BREZHONEG-ER-GER.pdf).

Un eil pazenn a voe graet c'hoazh pa gave deomp e vefe mat kinnig dibennoù-sizhun evit ar familhoù. Ar pezh a zo bet graet e Mahalon e 2015 hag e 2016, Brasparzh e 2016 hag e 2017, hag e Berrien e 2017. En dibennoù-sizhun-se e teu ingal un 30 perzhiad bennak.

War un ton un tamm brasoc'h hon eus aozet daou zevezh hanter war Enez-Vaz ar bloaz-mañ e miz Ebrel 2018 ; divizet hor boa digeriñ an devezhioù-se d'an holl ha pa vefent hep bugale ; hag un digarez hor boa kavet : kregiñ da lidañ 70^{vet} deiz-ha-bloaz KEAV. Ouzhpenn kant den a oa en em gavet en ur greizenn vakañsoù, plijus ha degemerus. An darn vrasañ a oa familhoù gant bugale. Ha birvilh a oa eta gant ar vugale, brezhoneg gant an holl ha pa ne oa ket an holl en o aes c'hoazh ! Daou zevezh hanter war an enez, daou zevezh hanter leuniet mat. Brav e oa an amzer, war-bouez penn kentañ mintinvezh ar Sul. Obererezhioù a-stroll evit an holl (c'hoarioù d'ober anaoudegezh an deiz kentañ pe pourmenadennoù), obererezhioù disheñvel a-wechoù, kranketa, kanañ, dañsal, selaou kontadennoù evit ar vugale hag o zud. An dud gour hep bugale 'oa bet kinniget dezhe mont da weladenniñ ar vro, studiañ ar bezhin gant un arbennigour ha mont da gaozeal gant brezhonegerion an enez. Un nozvezh laouen, ur c'hwizz evit an holl da gentañ, un abadenn kan evit ar vugale gant Jakez ar Borgn, ur fest-

noz da c'houde gant tud eus an enez ha tud deuet eus an douar bras.

Peseurt kentel tennañ eus an dibenn-sizhun-se ? Niver an dud deuet a ziskouez splann e ra diouer d'ar familhoù seurt degouezh ma c'hallont en em gavout asambles, niverus, en un endro plijus. Diskouez a ra ur mank anat, met ivez youl greñv ar familhoù a zo o klask an tu d'ober gant ar yezh war ar pemdez, ar pezh n'eo ket aes atav evite. Diskouez a ra e kompren muioc'h-mui ar familhoù n'eo ket trawalc'h skoliata o bugale e brezhoneg, met reiñ ur ster d'o dibab a rankont hag e tle ar brezhoneg tremen treuzoù dor o zi. Tremen poent eo aozañ seurt degouezhioù ingal a-hed ar bloaz hag e pep lec'h. Daoust ha ne c'hellfe ket rouedad stank *Tiez ar vro* dibab ar raktres-se da raktres boutin etrezo holl en ur vodañ kerent ar skolioù divyezhek ha re ar skolioù Diwan, skolidi ar c'hentelioù-noz ha re ar stummadurioù hir a zo war o zachenn ? Daoust ha ne c'hellfe ket ar rannvroioù, an departamantoù, an tiez-kêr, sinet ganto karta *Ya d'ar Brezhoneg*, skoazellañ seurt raktres en ur reiñ ur sikour arc'hant d'ar familhoù ? Ker e koust d'an aozadurioù dreist-holl pa reont o seizh gwellañ evit kinnig prizioù izel a c'hell bezañ degemeret gant an holl familhoù.

Boulc'het eo an erv. Deomp holl da genderc'hel !

Neuze, ken ar bloaz a zeu war an enez ? Piv 'oar, ma chom an aerouant sioul en e buñs...

Gwenael Huon



KREIZENN DUDI E GWENGAMP

Roet e oa bet lañs d'ur greizenn dudi evit ar vugale e Gwengamp gant Kreizenn Sevenadurel Vrezhon Gwengamp e 2017. Hirie eo bodet ar c'hevredigezhioù brezhon dindan an anv *Ti ar Vro Gwengamp an Arvor hag an Argoad*.

Bep Merc'her e vo graet war-dro ar vugale (etre 3 ha 10 vloaz) e brezhoneg a-drugarez d'un emglev gant ar c'h/CAF, an ti-kêr hag an tolpad kêrioù GP3A. Ur skoazell arc'hant bet roet gant *Ar Redadeg* he deus roet lañs ivez da gas ar raktres da wir a-hed ar bloavezh-skol.

Evit gouzout hiroc'h : 02 96 44 27 88

kreizenn.gwengamp@orange.fr

BAK E BREZHONEG



Goulennet e oa bet e-kerzh ar bloaz gant liseidi *Diwan* an aotre da skrivañ o c'hopiennoù e brezhoneg evit ar bak matematik, ul lizher a oa bet kaset gant Loïc Chesnais-Girard d'ar ministr da zifenn diviz al liseidi. Nac'het e oa bet outo gant ar Rektordi. Daoust da se eo e oa bet divizet gant 15 anezho tremen dreist d'an aotreoù ha kas ar stourm war-raok, arvarus e oa evite ha kalonek int bet. Chomet eo ar Rektordi reut war e dach ha goulennet digant ar gelennerien notenniñ hepken ar pezh a oa skrivet e yezh “matematik” hag e galleg. D'an 28 a viz Even o doa divizet al liseidi sevel klemm evit ma vo sellet pizh ouzh o afer gant “difennour ar gwirioù”, Jacques Toubon.

Hep bez' sur da vat, ne seblant ket e vefe bet heuliet urzhioù ar Rektordi gant an difazierien en ur mod ken strizh ha ma oa bet lâret

dezho ober p'en deus bet unan eus al liseidi 17/20 e matematik hag eñ e rann S. Emañ skipailh *Bak e brezhoneg* en sell goulenn ar c'hopiennoù difaziet dre hanterouriezh ur breutaer. Prest eo *Skoazell Vreizh* (kannadig miz Gouere 2018) da reiñ harp d'al liseidi ma vez goulenn eus o ferzh.

Tapet eo bet ar bak gant 14 diwar ar 15 lisead.

Gant ul lod skolajidi eo bet graet kemend-all evit ar brevet met ar wech-mañ eo bet kaletoc'h emzalc'h an ensellerien p'eo bet rediet ar gelennerien da lakaat mann d'ar re o doa kredet mont dreist da reolennoù ar Republik ! E Bro-Euskadi eo aotreet ar matematik e euskareg evit ar brevet abaoe 2012. Er bloaz-mañ 179 skolajiad eus akademiezh Bourdel o deus skrivet o c'hopiennoù Skiantoù en euskareg pa 'z eo difennet.

A-benn bloaz evit ar c'hentañ klas hag a-benn daou vloaz evit ar c'hlas termen e vo cheñchamant bras : ul lod eus an danvezioù a vo priziet el lise e-kerzh ar bloaz, arnodennoù dibaouez.

Peseurt reolennoù a vo lakaet ? Peseurt stourm a vo ret kas da benn ?

Riwal Huon

RADIO NAONED

Kaset war-raok gant skipailh *Radio Kerne*, emañ raktres *Radio Kerne-Naoned* o vont war-raok. Un droiad emvodoù foran a zo bet aozet gant prezidant ha skipailh implijidi Radio Kerne e miz Gwengolo. Bez' e oant e Brest d'an 12 ; e Kemper d'an 13, e Gwengamp d'ar 14 ; e Gwened d'an 19 ; e Roazhon d'an 20 hag e Naoned d'an 21.

E deroù 2019 e loc'ho ar skignañ. Un nevezenti vras evit Bro-Naoned. Dizale e vo roet lañs d'ur c'houlzad arc'hantaouiñ.

Gouzout hiroc'h : radiokerne.bzh

KOLLOG TREUZKAS AR YEZH ER FAMILHOÙ EN ORIENT _____

Kenaozet eo ar c'hollog gant Kuzul Sevenadurel Breizh ha Skol-veur Kreisteiz Breizh, gant skoazell ar C'huzul-rannvro, Skol-veur Roazhon 2 ha Kreizenn an enklaskoù breizhek ha keltiek R2. Dalc'het vo d'an 23 ha 24 a viz Du 2018 e Skol-veur Kreisteiz Breizh 4 straed Jean Zay, Kevrenn al lizhiri, savadur Le Paquebot, sal vras Chappé.

An treuzkas yezh en tiegezhioù eo an dodenn studi. Skolveuridi eus 6 skol-veur european a vo bodet da zisplegañ o enklaskoù, da ginnig ostilhoù ha doareoù da reiñ lañs d'ar yezhoù minorelaet hag en arvar. Setu an danvezioù pennañ :

- Deskrivañ stad an treuzkas er familhoù o keñveriañ un toullad yezhoù minorelaet all en Europa ar c'hornôg ;

- Diskouez pegen pouezus eo an treuzkas er familhoù evit ma chomo bev ar brezhoneg hag ar yezhoù minorelaet ;

- Kinnig binvioù d'an dilennidi evit ma vo kemeret e kont an treuzkas er politikerezhioù publik.

Katell Chantreau a raio ur rentañ-kont eus he enklask : goulennataet he deus kalzik tadoù ha mammoù evit gwelet penaos e vez, pe ne vez ket treuzkaset ar brezhoneg er familhoù hiziv. Devezhioù preder hag eskemm eus ar pouezusañ evit hor yezh hag an holl re a glask bevañ e brezhoneg war ar pemdez hag en o buhez familh ha prevez.

EVEL KI HA KAZH, UR STIRAD GANT BARZHANOFF _____

Ur stirad sketchoùigoù berr a oa bet savet warlene gant *Barzhanoff*, ur strollad c'hoariva staliet e Bro-Roazhon. Un eil koulzad emaint o kinnig ha bep Gwener e c'heller mont war *Facebook* « Skipailh Barzhanoff », *Youtube* « Evel Ki ha Kazh » pe *Twitter* da heuliañ troioù an tudennoù : istorioù o c'houbladoù, o familhoù, oc'h amezeien. Hag ouzhpenn-se, teir zudenn nevez a vo kavet ar bloaz-mañ !

E miz Du 2017 ez eas Herve Konan da Anaon. Mab da Jakez Konan ha breur da c'hGireg Konan, anavezet mat e Bro-Perroz. Ur fazi mantrus hor boa graet en niverenn 425, pajenn 103. Ur roll eus skridoù bet embannet e *Tir-na-nÓg* en hor c'helaouenn ha sinet Herve Konan hor boa lakaet war e gont. Ar skridoù-se a zo reoù Armañs ar C'halvez, beleg hag aluzenner, aet da Anaon e 1972.

Herve Konan a oa o chom e Kanada. Dont a rae ingal da Vreizh. Ur c'helenner ampart oa. « Lakaat a rae buhez en e gentelioù. Mont a rae ingal da Gamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien da gas en-dro ar vuhez, da veskañ, kement ha reiñ c'hoant d'an dud da gomz brezhoneg. Ur gwir vuhezour e oa a blije dezhañ degas joa e bed ar brezhoneg. Met skrivagner ne oa ket siwazh. » Sed ar pezh en deus Gireg Konan skrivet deomp. Ra vo trugarekaet.

UR RENEREZ NEVEZ EVIT LISE DIWAN _____

Ur renerez nevez a zo bet anvet e Lise Diwan e Karaez, Dora Vargas eo eus Kolombia. Kelennerez war ar spagnoleg e oa betek-henn. Ouzhpenn 20 vloaz zo emañ o vevañ e Breizh. Div verc'h he deus hag emañ o chom e Karaez.

Nerzh ha startijenn a hetomp dezhi evit kas war-raok mont en-dro al lise. Ul labour fonnus ha start alies pa ouezer pegen hollbouezus eo kempouezañ ar vuhez pemdez hag ar skoliata e brezhoneg el lise Diwan nemetañ.

AR BREZEL BRAS E BREZHONEG _____

Aozet e vo ur penndevvezh studi (14:00 - 18:00) d'ar Merc'her 14 viz Du 2018 e Skol-veur Roazhon 2 (Sal 224 - savadur E).

Klevet e vo Daniel Carre (*Netra nevez... ha kantadoù a bajennadoù duet neoazh*), Joseph Martin (*Buhez ar soudarded war an talbenn hervez barzhonegoù Y. M. Normand*), Gwendal Denez (*Dremm an Ankoù gant Abeozen*), Yann Verney (*Pasion Goneri : ar brezel hervez Job ar Bayon*), Herve Peaudecerf (*Binviñ evit kelenn ar Brezel bras e brezhoneg en eil derez*) hag evit echuiñ e vo aozet un daol-grenn gant Erwan Hupel : *Kant vloaz war-lerc'h : kelenn ha lenn skridoù brezhonek ar Brezel bras*.